

KANTIK

SANTEZ ANNA TRÉGASTEL

DISKAN

Itron santez Anna,
Mamm goz ar Vretoned,
Gret ma voint dreist pep tra
Kristenien vad bepred.

Konaret vel ar mor,
Satan zo trouz gant-han :
He ifern zo digor,
Digor braz d'hon lonkan.

Redeg a ra ar bed
War-lerc'h ann ineo,
Ha mar ne zikouret
War-n-omb e c'honeo.

Lemmel a rei ho Fe
Digant ar Vretoned :
Liez ar wirione
Gant ar gaou zo trec'het.

Kenavezo neuze
D'ar peuc'h ha d'ann urz vad!
Anez doujans Doue,
Nemet trouz ne ve kad.

Ar Fe en ti ar paour
A zo well vit mado :
Na plijadur, nag aour
Ne digor ann Envo.

Nag aour, na plijadur,
Ne zo evurusted :
En ti ar c'hristen fur,
Eno e vo kavet.

Leviet c'hoaz hon bago
Du-hont mesk ar gerek,
Hag er ger ho devo
Ho bara pemdeiek.

Miret ar martolod
A zo pell, ò Itron,
Ma teuio c'hoaz devot
Da bedi d'ho pardon.

Miret-han didamall
Du-hont pell diouz ar ger :
Du-hont e ver ker fall,
Hag hen zo ken dister.

Tregastel eo ho pro,
Itron Santez Anna,
Roet d'he zouaro
Bennoz Doue bep bla.

Ni fell d'imp c'hoaz bean
Tud evel hon zud koz,
A glaské da gentan
Ho lod er baradoz.

Iec'hed, boed ha dillad,
Treoego ann douar,
Hon do war ar marc'had,
Rak Jezuz hel lavar.

Ha bep bla vo laret :
War odcho Breiz-Izel,
N'euz ket muoc'h pleustret
Vit pardon Tregastel.

Ha ni gano emberr
Du-hont er baradoz,
Ni a gano zeder :
Trugare, ò Mam goz!

LAOUENANIG S^t ERWAN.

M^r Le Gon.

Ra vezo moulet ar c'hantik-man, ken enoruz da
Zantez Anna, ken talvouduz da neb hen Kano gand
devosion!

Imprimatur. Brioci, die 15^a novembris 1893.

LE PROVOST.

Vic. gén., Archid. Trecoren.

KANTIK *all*
da Zantez Anna.
~~SANTEZ ANNA TRÊGASTEL~~

DISKAN

Itron Zantez Anna,
Mamm goz ar Vretoned,
Gret ma voint dreist pep tra
Kristenien vad bepred.

Konaret vel ar mor,
Satan zo trouz gant han : 97
He ifern zo digor,
Digor braz d'hon lonkan.

Redeg a ra ar bed
War/lerc'h an/ineo, 97 91
Ha mar ne zikouret
War/n/omb e c'honeo. 97 91

Lemmel a rei ho Fe
Digant ar Vretoned :
Liez ar wirione
Gant ar gaou zo trec'het.

Kenavezo neuze
D'ar peuc'h ha d'an / urz vad! 9/
Anez doujans Doue,
Nemet trouz ne ve kad.

Ar Fe en ti ar paour
A zo well vit mado :
Na plijadur, nag aour
Ne digor ann / Envo. 9/

Nag aour, na plijadur,
Ne zo evurusted :
En ti ar c'hristen fur,
Eno e vo kavet.

Leviet c'hoaz hon bago
Du-hont'mesk ar gerek,
Hag er ger ho devo
Ho bara pemdeiek.

Miret ar martolod
A zo pell, ð Itron,
Ma teuio c'hoaz devot
Da bedi d'ho pardon.

Miret-han didamall
Du-hont pell diouz ar ger ;
Du-hont e ver ker fall,
Hag hen zo ken dister.

Tregastel eo ho pro,
Itron Santez Anna,
Roet d'he zouaro
Bennoz Doue bep bla.

Ni feil d'imp c'hoaz bean
Tud evel hon zud koz,
A glaske da gentan
Ho lod er baradoz.

Iec'hed, boed ha dillad,
Treoego an ~~an~~ douar,
Hon do war ar marc'had,
Rak Jezuz hel lavar.

9/

Ha bep bla vo laret :
War odcho Breiz-Izel,
N'euz ket muoc'h pleustret
'Vit pardon Tregastel.

Ha ni gano emberr
Du-hont er baradoz,
Ni a gano zeder :
Trugare, ò Mam goz! (1)

~~LAQUENANIG S^t ERWAN.~~

~~Ra vezo moület ar c'hantik-man, ken enoruz da
Zantez Anna, ken-talvouduz da neb hen Kano gand
devosion!~~

~~Imprimatur. Brioci, die 15^a novembris 1893.~~

~~LE PROVOST.~~

~~Vic. gén., Archid. Trecoren.~~